

Servij keodedel



KEMER PERZH E TREUZKAS HA
SKIGNAÑ SEVENADUR BREIZH
D'AN HOLL RUMMADOÙ OAD

EMGLEV BRO DOUARNENEZ



Skoazell war aozadur festival Dispar Amzer ha mizvezh ar brezhoneg



Emglev Bro Douarnenez a zo bet krouet e 1996 gant ar pal bodañ an dud hag ar c'hevredigezhioù tro-dro d'ar brezhoneg ha da sevenadur Breizh. Bevañ ha difenn sevenadur Breizh a zo evit Emglev Bro Douarnenez kement ha bezañ digor war ar bed ha gwrizienet en e goulz amzer. Ar gevredigezh a ginnig darvoudoù liesseurt digor d'an holl hag evit an holl oadoù : Mizvezh ar brezhoneg e miz Meurzh, ar c'hreizennoù vakañsiñ e brezhoneg evit ar vugale hag ar grennarded e-pad an hañv war Enez Sun, festival Dispar Amzer en diskar-amzer... Tapis lenn, prezegenn, sonadegoù, fest-noz, stajoù, kejadennoù, diskouezadeg : pep doare zo mat a-benn lakaat da vevañ ar yezh ha sevenadur Breizh ! Ur skipailh joiaus a zo ouzhomp gant div gopradez, 15 ezel er c'huzul-merañ ha kalzik a dud a youl vat.

E 2026 he do 30 vloaz ar gevredigezh. Evit an degouezh-se, e aozomp ur stumm ispisial eus festival Dispar Amzer gant ur sell war-giz evit deiz-ha-bloaz ar gevredigezh ha pedadenn arzourien euskarat. Ouzhpenn ur mizvezh festoù evit an holl oadoù, adalek an 3 a viz Here betek ar 14 a viz Du 2026.

Ezhomm hon eus eus da sikour a-benn kas ar gefridi-se ! Gellout a raio bezañ astennet betek miz Meurzh 2027 gant aozadur ha lid mizvezh ar brezhoneg e Bro Douarnenez.

Pal



Skoazellet gant ar skipailh gopradi ha gant an dud a youl vat, da gefridi a vo sikour evit aozadur ar festival : souten aozadur ar c'hilsell o kemer perzh e diellañ an dud a youl vat kozh ha tud a youl vat nevez ar gevredigezh, merañ an dud a youl vat e-pad mareoù kreñv ar festival, souten evit ar c'hehentiñ, souten evit aozadur an darvoudoù. Da geñver mizvezh ar brezhoneg, kenurzhiet gant Rannvro Breizh, e c'helli ijinañ ar programm asambles ganeomp ha kemer perzh zoken da brantadoù buheziñ ma karez !

Obererezhioù



- Kemer perzh e aozadur fest 30 vloaz ar gevredigezh (d'ar 17 a viz Here 2026) ha da grouidigezh ur savadenn son ha d'un diskouezadeg vihan asambles gant ar re a youl vat.
- Kemer perzh e aozadur darvoudoù disheñvel ar festival hervez da c'hoantoù, atav e liamm gant ar c'hopradi (tapis-lenn evit ar re yaouank, arvest evit ar skolioù, prezegenn, stajoù arzel, aozadur un emgav war ar c'hrouiñ e yezhoù

minorel, skignadenn...).

- Kemer perzh e dibenn-sizhun klozañ ar festival, e karg eus an dud a youl vat hag e souten d'an darvoud (beilhadeg kanet, stajoù ha bal/fest-noz) 13 ha 14 Du 2026.
- Kemer perzh e koulzad tuta tud a youl vat. Merañ aozañ ha nevesadur an implijoù-amzer ha kenurzhiañ an dud a youl vat e-pad ar festival.
- Kemer perzh e krouidigezh skorioù kehentiñ gant ar c'hrafourez ha merañ ar c'hehentiñ war ar rouedadoù sokial.
- Aozañ ha kemer perzh e mizvezh ar brezhoneg adalek miz Genver betek miz Meurzh 2027 (aozadur obererezhioù evit ar yaouankiz tro-dro d'ar brezhoneg ha da sevenadur Breizh : c'hoarioù kevredigezhel, ermaeziadennoù, atalieroù dañs e kreizenn degemer dudi, stummadur baby-sitting... Pep tra a zo da ijinañ asambles !).

Barregezh da gemer intrudu



Da vennozhioù ha da ginnigoù a zo degemeret mat ! O klask un den youlek, engouestlet ha mennet emamp. Komz brezhoneg a zo degemeret mat met n'eo ket rekis.

Endro



Da gefridi a gasi da benn e burevioù Emglev Bro Douarnenez, e **13 straed Michel Le Nobletz 29100 Douarnenez**. An div c'hopradez a zo eno eus al Lun d'ar Gwener, etre 9e ha 5e30. Un nebeud emvodoù zo gant an dud a youl vat hag izili ar c'huzul-merañ a zo deuzout goude 6e g.m. hag a echuo atav a-raok 9e noz. Darvoudoù zo a c'hoarvezo ivez e-pad an dibennoù-sizhun ha/pe e-pad nozvezhioù e miz Here hag e miz Du. Ar mareoù bezañs-se e diavaez an eurvezhioù termenet a vo adtapet.

Ambrouget e vi gant Anaëlle Le Pann, kenurzhierz ar gevredigezh, a vo ivez da heñcherez hag Agathe Séité, gopradez e-karg eus festival Dispar Amzer. Un den dave eus ar c'huzul-merañ a vo ganit ivez.

E-kerzh da gefridi servij keodedel, e ranki kemer perzh en ur stummadur war ar sikourioù kentañ hag unan all war ar geodedouriezh. An daou a zo rediet.

Titouroù pleustrek



Deroù ar gefridi : Gwengolo 2026

Padelezh : 7 miz

24eur/sizhun

Lec'h : Douarnenez (29)